



Breizh Diawel

Goulennaoueg a-zivout ar santad perzhouriezh e Breizh e Liger-
Atlantel

Gouere-Eost 2021

Sevenet gant Ismael Morvan, gouleviet gant Jean Ollivro

Trugarez da

Jean Ollivro,

Anne-Edith Poilvet,

Bertrand Nicolas,

Thomas Nedelec,

Marie Bridel

evit o skoazell.

Teul Breizh Diawel

Krennva

Raklavar	4
Perak kas ar studiaden-se da benn ?	4
Degemer ar c'houlennaoueg	4
Hentennoiezh.....	4
Respontoù ha dezrannoù.....	5
1) Skeuliadet etre mann ha dek, penaos e teskrivfec'h ho santad perzhouriezh e Breizh ? .	5
2) Hag e lavarfec'h ez it alies e darvoudoù sevenadurel liammet da Vreizh e Liger-Atlantel ?	7
3) Hervezoc'h, hag ur mennozh mat e vefe adunvaniñ Breizh (eleze gant Liger-Atlantel) ?	10
4) Mard oc'h a-du gant an adunvaniezh, menegit ho emplegañ e argraf an adunvaniezh. .	13
5) Pa vefec'h a-du pe get gant an adunvaniezh, hag e soñj deoc'h e vo diouti en dazont ? .	14
6) Hervezoc'h, e peseurt tachenn e rankfe Liger-Atlantel en em glevout gant ranndir Breizh da gentañ ?	18
7) Anv	19
8) Kentanv	20
9) Kumun.....	20
10) Oad	23
11) Reizh.....	24
12) Micher	25
13) Abaoe pegeit emaoe'h e Liger-Atlantel ?	25
Klozadur	28

Raklavar

Perak kas ar studiaden-se da benn ?

Meur a enklask zo bet graet a-zivout an adunvaniezh, ar sevenadur breizhat e Liger-Atlantel, ha santad perzhouriezh e annezidi¹. En o souezh e c'heller menegiñ studiaden TMO (2019) ha hini ifop (2021). Hogen, meur a ditour a chome kevrinus evidon, zoken goude bezañ lennet ar studiadennoù-se, titouroù a c'hellfemp renkañ e dachenn ar gevredadouriezh. Laouen e vefen bet da c'houzout a belec'h e teue an dud o stourm evit an adunvaniezh, pe gant ur santad perzhouriezh breizhat d'an nebeutañ. Deurus e oa din gouzout ivez hag e oa ul liamm strizh etre sevenadur breizhat ha santad perzhouriezh. Pe c'hoazh gouzout tevet an dud e argraf an adunvaniezh (armerzh, sevenadur, politikerzh h.a.) Gouzout, gouzout, gouzout : orin an enklask zo ur ranellerezh hiniennel, hag emichañs e vo bastus va ranellerezh d'al lennerion, o sikour an dud da gompren un tamm muioc'h skod ar santad perzhouriezh e Breizh e Liger-Atlantel.

Degemer ar c'houlennaoueg

D'an 13 a viz Gouere 2021 eo bet lañset ar c'houlennaoueg, ha serret d'an 20 a viz Eost. 457 annezad eus Liger-Atlantel o deus respontet. Tud gant ur santad perzhouriezh breizhat o deus respontet dreist-holl evel gortozet (s.o. an titouroù krai), ha deur ar studiaden zo livañ poltred ar re a-du gant an adunvaniezh. N'eo ket ar studiaden-mañ ur sontadur. Div zisplegadenn a gaver da se. Da gentañ eo techetoc'h unan bennak da gemer amzer da respont d'ur c'houlennaoueg a-zivout ar santad perzhouriezh e Breizh e Liger-Atlantel mar bez eñ tost diouzh ar santad-se ha mar bez gentañ ar c'hoant en diskouez. Da eil, ar mediaoù hag an dud laouen da skignañ ar c'houlennaoueg dre vras oa dreist-holl tost diouzh metoù ar sevenadur breizhat. Setu daou vennozh ar studiaden enta : anavezout gwelloc'h aelad an dud a-du gant an adunvaniezh, ha displegañ o santad perzhouriezh dre an douaroniezh hag ar gevredadouriezh. Gant an disoc'hoù e vezer sklêrijennet a-zivout kevredadouriezh annezidi Liger-Atlantel gant ur santad perzhouriezh breizhat hag a-du gant an adunvaniezh.

Hentennoniezh


Dibabet 'm eus amañ lakaet war well an titouroù krai da gentañ, eleze respoñtoù an dud end-eeun. Un dezrann pe un evezhiaden hiniennel 'm eus ouzhpennet en hevelep koulz dre ma gave din bezañ aesoc'h da lenn ha da heuliañ evel-se. Evit klokaet va dezrannoù em eus arveret siloù a-benn kroaziañ an titouroù ha kaout ur sell klokoc'h a-zivout an dodenn. Meneget e vo goude pep sifr pe bep taolenn ar sil arveret. Da skouer mar bez krai an titour, eleze ar respont roet end-eeun er c'houlennaoueg, e vo skrivet « titour krai », mar bez eus ur sil e vo skrivet da gentañ e komzer eus un titour nann-krai, meneg ar goulenn ma gomzer diwar e benn, war beseurt goulenn eo bet lakaet ur sil ha ster ar sil, da skouer : « titour nann-krai, respont 5 (peogwir e komzer eus ar goulenn 5), sil goulenn 1 (ar sil zo lakaet war ar goulenn 1) = 10 (ar respoñterion o deus priziet da zek ar respont 1) ». En un doare eeunoc'h komz a reer amañ eus ar pezh o deus respontet er goulenn 5 ar re o deus lakaet 10 er goulenn 1. Aes eo da gompren en ur lenn an enklask.

¹ Jean Poupinot, *LE SENTIMENT D'APPARTENANCE BRETONNE EN LOIRE-ATLANTIQUE*, Kendalc'h, 1972.

Respontoù ha dezrannoù

- 1) **Skeuliadet etre mann ha dek, penaos e teskrivfec'h ho santad perzhouriezh e Breizh ?** *Mann o talvezout n'hoc'h eus netra da welet gant Breizh ha dek o talvezout en em santit breizhad penn-da-benn.*

Skeuliadet etre mann ha dek, penaos e teskrivfec'h ho santad perzhouriezh e Breizh ? / Sur une échelle de zéro à dix, comment décririez-vous votre sentiment d'appartenance à la Bretagne ? Mann o talvezout n'hoc'h eus netra da welet gant Breizh ha dek o talvezout en em santit breizhad penn-da-benn. / Zéro signifiant que vous n'avez rien à voir avec la Bretagne et dix que vous vous sentez complètement breton.



Score moyen	0	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
9.22	13	1	2	3	3	4	7	8	25	40	351
	2.84 %	0.22 %	0.44 %	0.66 %	0.66 %	0.88 %	1.53 %	1.75 %	5.47 %	8.75 %	76.81 %


Diwar ar 457 respont, 94,31% a briz o santad perzhouriezh breizhat a-us da bemp, ha 76,81% da zek pergen. 5,7% a briz ar santad perzhouriezh-mañ da bemp pe nebeutoc'h (titouroù krai)

94,31% eus ar responderion a briz o santad perzhouriezh a-us da bemp. Setu perak e vez skeudennet dreist-holl gant ar c'houlennaoueg-se an dud o deus ur santad perzhouriezh e Breizh kreñv, 5,7% a dud ha n'en em santont ket breizhiz o vezañ re nebeut evit ober ur ventel ergorel ha sur, meneget e vo anezho a-wechoù memestra met an titouroù-se a vo da gemer gant kalz a evezh.

Dav eo menegiñ memestra un anadenn deurus amañ : an niver a dud o deus respontet en un nebeud a amzer. 457 a dud o respont en ur miz hanter evit ur c'houlennaoueg zo kalzik, dreist-holl evit un dodenn ken resis hag ar santad perzhouriezh e Breizh e Liger-Atlantel, a zo un dachenn bevennet a-walc'h memestra. Diskouez a ra an dra-se ur varregezh a enluskerezh

a-berzh an dud tost diouzh an argraf. An dud gant ur santad perzhouriezh breizhat kreñv e Liger-Atlantel o deus ezhomm en diskouez, ar pezh n'eo ket ken gwir evit ar re ne santont santad perzhouriezh ebet e Breizh, pe a vefe a-enep ar mennozh-se zoken. An dra-se zo splann o welout an diforc'h bras etre ar re o deus meneget dek hag ar re all. 76,81% o deus dibabet priziañ o santad perzhouriezh da zek. Penaos displegañ un diforc'h ken bras, zoken da geñver ar respontoù eizh ha nav ? Div zisplegadenn zo. Da gentañ hini an deour adare, eleze an dud gant ur santad perzhouriezh kreñv kreñv a vo techetoc'h da gemer amzer da respont da seurt goulennaoueg, met ivez da gas da genelied dezho, da embann war o rouedadoù kevredadel, da vountañ izili o familh da respont ivez h.a. Unan bennak hag en defe ur santad perzhouriezh krenn lakaomp na gernerfe ket kement a c'hremm evit se. An eil displegadenn, a zo liammet strizh, zo an efed a boblvouezhiadeg. Evel ma'z eo un argraf politikel an adunvaniezh eo ret prouiñ ez eus tud e leizh o kaout ur santad perzhouriezh kreñv e Breizh. Neuze ur responder a en em santfe breizhad, met ket muioc'h eget se, a responto dek memestra mard eo stag ouzh mennozh an adunvaniezh. An dra se zo splann pa seller ouzh santad perzhouriezh e Breizh an dud o deus priziet da zek mennozh an adunvaniezh :

Skeuliadet etre mann ha dek, penaos e teskrivfec'h ho santad perzhouriezh e Breizh ? / Sur une échelle de zéro à dix, comment décririez-vous votre sentiment d'appartenance à la Bretagne ? Mann o talvezout n'hoc'h eus netra da welet gant Breizh ha dek o talvezout en em santit breizhad penn-da-benn. / Zéro signifiant que vous n'avez rien à voir avec la Bretagne et dix que vous vous sentez complètement breton.




Score moyen	0	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
9.78	0	0	0	0	0	0	3	2	20	27	335
	0 %	0 %	0 %	0 %	0 %	0 %	0.78 %	0.52 %	5.17 %	6.98 %	86.56 %

86,56% eus ar responderion o deus priziet da zek mennozh an adunvaniezh (goulenn 3) o deus priziet da zek o santad perzhouriezh e Breizh (titour nann-krai, respont goulenn 1, sil goulenn 3 = 10)

Gwelet e vez amañ eo kenliammet priziañ e santad pezhouriezh e Breizh ha priziañ mennozh an adunvaniezh. An dud o deus priziet da zek mennozh an adunvaniezh zo ar re gant ur santad perzhouriezh kreñv : 86,56%, pa'z eo 76,81% evit ar respontoù hollek, eleze dek poent dregantad ouzhpenn. An dra se a gadarn mennozh efed ar boblvouezhiadeg.

2) Hag e lavarfec'h ez it alies e darvoudoù sevenadurel liammet da Vreizh e Liger-Atlantel ? (festoù-noz, saloñsoù, diskouezadegoù, mirdioù, sonadegoù h.a...) Mann o talvezout ned it morse e seurt darvoudoù ha dek o talvezout e kemer ur plas pouezus en ho puhez.

Hag e lavarfec'h ez it alies e darvoudoù sevenadurel liammet da Vreizh e Liger-Atlantel ? (festoù-noz, saloñsoù, diskouezadegoù, mirdioù, sonadegoù h.a...) / Diriez-vous que vous allez souvent à des événements culturels liés à la Bretagne en Loire-Atlantique ? (festoù-noz, salons, expositions, musées, concerts etc...) Mann o talvezout ned it morse e seurt darvoudoù ha dek o talvezout e kemer ur plas pouezus en ho puhez. / Zéro signifiant que vous n'allez jamais à ce genre d'événement et dix signifiant que cela prend une part importante de votre vie.




Score moyen	0	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
6.28	25	14	29	19	18	75	46	41	66	29	93
	5.49 %	3.08 %	6.37 %	4.18 %	3.96 %	16.48 %	10.11 %	9.01 %	14.51 %	6.37 %	20.44 %

19,12% eus ar responderion o deus priziet da nebeutoc'h eget pevar o c'hemer perzh e darvoudoù sevenadurel liammet da Vreizh. 30,55% o deus e briziet etre pevar ha c'hwec'h ha 50,33% etre seizh ha dek (titouroù krai)

Disrannet eo an traoù da vat : hanter ar responderion a gav dezho ez eont alies mat e darvoudoù sevenadurel liammet da Vreizh hag an hanter all n'ez eont ket pe nebeut. Merzhet e vez amañ n'eo ket splann splann al liamm santad pezhouriezh ha kemer perzh e darvoudoù

sevenadurel, eleze an dud gant ur santad perzhouriezh breizhat hag a-du gant mennozh an adunvaniezh n'int ket dre ret deuriet gant an darvoudoù sevenadurel breizhat. N'eo ket splann an tuadur d'an nebeutañ. Ur geflended a c'heller merzhout etre emplegañ e argraf an adunvaniezh ha kemer perzh e darvoudoù sevenadurel avat :

Mard oc'h a-du gant an adunvaniezh, menegit ho emplegañ e argraf an adunvaniezh. / Si vous êtes favorable à la réunification, mentionnez votre engagement sur la question de la réunification. Mann o talvezout ne emplegit tamm ebet ha dek o talvezout e kemer ur plas pouezus en ho puhez. / Zéro signifiant que vous ne vous impliquez pas du tout et dix signifiant que cela prend une place importante dans votre vie.




Score moyen	0	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
9.57	0	0	0	0	0	2	2	3	4	3	74
	0 %	0 %	0 %	0 %	0 %	2.27 %	2.27 %	3.41 %	4.55 %	3.41 %	84.09 %

84,09% eus ar responderion o priziañ da zek o c'hemer perzh e darvoudoù sevenadurel breizhat a briz da zek o emplegañ e argraf an adunvaniezh (titour nann-krai, respont 4, sil goulenn 2 = 10)

84,09% eus ar responderion az a alies e darvoudoù sevenadurel breizhat a briz da zek o emplegañ e argraf an adunvaniezh, pa'z eo 45,09% er respontoù hollek (s.o. goulenn 4) . Tu zo soñjal ez eo abalamour d'un istor a amzer : un den gant muioc'h a amzer a c'hellfe bezañ oberiantoc'h e darvoudoù sevenadurel pe e argraf an adunvaniezh. An doare oustilh zo ganeomp evit priziañ an dra se zo ar micherioù. 30,1% eus ar re o deus priziet da zek o c'hemer perzh e darvoudoù sevenadurel liammet da Vreizh zo disoberiat (titour nann-krai, respont goulenn 12 gant sil goulenn 2 = 10), ar pezh a zo kazi an hevelep dregantad eget keidenn an dud o deus repontet (s.o. goulenn 12), neuze ne c'heller ket ober a geflended etre amzer ha kemer perzh en darvoudoù sevenadurel. Un displegadenn a c'hellfe bezañ ar fed eo alies kenliammet an darvoudoù sevenadurel breizhat hag argraf an adunvaniezh e Liger-Atlantel : ur fest-noz e Liger-Atlantel en deus, en un doare eeun pe dieeun, ur ster politikel. Neuze evit an hevelep darvoud e c'hell ur responder e sellout evel un darvoud sevenadurel ha politikel.

Un geflended ouzhpenn zo deurus da venegiñ zo al liamm er c'hemer perzh en darvoudoù sevenadurel breizhat hag ar spi en adunvaniezh, a zo un tamm uheloc'h eget ar geidenn :

Pa vefec'h a-du pe get gant an adunvaniezh, hag e soñj deoc'h e vo diouti en dazont ? / Que vous soyez favorable ou non à la réunification, pensez-vous qu'elle aura lieu dans le futur ? Mann o talvezout n'ez eus chañs ebet e c'hoarvezfe ha dek o talvezout eo sur e vo diouti. / Zéro signifiant qu'il n'y a aucune chance que cela arrive et dix signifiant que c'est sûr qu'elle aura lieu.




Score moyen	0	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
8.52	1	1	1	2	1	7	3	8	8	4	57
	1.08 %	1.08 %	1.08 %	2.15 %	1.08 %	7.53 %	3.23 %	8.6 %	8.6 %	4.3 %	61.29 %

82,79% eus ar responderion o priziañ da zek o kemer perzh e darvoudoù sevenadurel breizhat a briz da seizh pe muioc'h o spi e dazont an adunvaniezh (titour nann-krai, respont 5, sil goulenn 2 = 10)

82,79% eus ar responderion az a alies e darvoudoù sevenadurel breizhat a briz da seizh pe muioc'h o spi e dazont an adunvaniezh pa'z eo da 63,81% er respontoù hollek (s.o. goulenn 5). Diaes eo displegañ ar spi-se. Un displegadenn a c'hellfe bezañ ar fed da gejañ gant tud all nes diouzh Breizh : tud o tañsal dañsoù breizhat, brezhonegerion, gallaouegerion, sonerion bagadoù, gourenerion h.a. Ar re o vont alies e darvoudoù sevenadurel breizhat o deus muioc'h a chañsoù da gejañ gant tud o soñjal evelto, a rofe un doare diarsell yael a-zivout an adunvaniezh.

3) **Hervezoc'h, hag ur mennozh mat e vefe adunvaniñ Breizh (eleze gant Liger-Atlantel) ?** Mann o talvezout e vefe un diskoulm fall kenañ ha dek o talvezout e vefe an diskoulm gwellañ da geñver an argraf.

Hervezoc'h, hag ur mennozh mat e vefe adunvaniñ Breizh (eleze gant Liger-Atlantel) ? / Selon vous, serait-il une bonne idée de réunifier la Bretagne (c'est-à-dire avec la Loire-Atlantique) ? Mann o talvezout e vefe un diskoulm fall kenañ ha dek o talvezout e vefe an diskoulm gwellañ da geñver an argraf. / Zéro signifiant que ce serait une très mauvaise solution et dix signifiant que ce serait la meilleure solution au regard de la problématique.



Score moyen	0	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
9.22	23	2	0	0	2	7	2	3	14	16	387
	5.04 %	0.44 %	0 %	0 %	0.44 %	1.54 %	0.44 %	0.66 %	3.07 %	3.51 %	84.87 %


84,87% eus ar responderion a briz da zek mennozh an adunvaniezh (titour krai)

Gwelet e vez amañ o deus darn ar responderion priziet da zek mennozh an adunvaniezh. An displegadenn zo sur a-walc'h an hevelep hini hag ar goulenn gentañ : an dud o kemer amzer da respont zo ar re zeuriet gant argraf an adunvaniezh. Efed ar boblvouezhiadeg zo ivez. Dav eo menegiñ memestra eo an disorc'h mann an eil goude an disorc'h dek : 5,04% hepken a briz mennozh an adunvaniezh da vann, talvezout a ra un dra bennak avat. Etre priziañ da zek pe da vann e kaver ur skod politikel en daou saviad, ret eo prouiñ un dra bennak : an adunvaniezh zo da vezañ graet penn-da-benn, pe a rank na vezañ graet tamm ebet.

Pa seller a dost ouzh ar re o deus priziet da vann mennozh an adunvaniezh e verzher traoù poellek : santad perzhouriezh e Breizh gwan, kemer perzh e darvoudoù sevenadurel pe emplegañ e argraf an adunvaniezh gwan ivez h.a. Santet e vez eo ur gevredadouriezh all. 73,91% o deus 49 vloaz pe nebeutoc'h (titour nann-krai, respont 10 goulenn 3 = 0), pa'z eo da 47,47% er respontoù hollek (s.o. goulenn 10). Muioc'h a verc'hed zo a-enep mennozh an adunvaniezh : 60,87% eus ar re a briz da vann mennozh an adunvaniezh zo merc'hed (titour nann-krai, respont

11 goulenn 3 = 0) pa n'int nemet 22,86% er respontoù hollek (s.o. goulenn 11). 47,82% zo o tont eus an Naoned (titour nann-krai, respont 9, sil goulenn 3 = 0), 24,07% evit ar respontoù hollek. An titouroù-se zo da gemer gant pled dre ma'z eo bihan ar standilhon : 23 den o priziañ mennozh an adunvaniezh da vann.


Oad/Âge



Intitulé des réponses	Nombre de réponses	Pourcentage
Nebeutoc'h eget 18 vloaz / Moins de 18 ans	0	0 %
Etre 18 ha 24 bloaz / Entre 18 et 24 ans	4	17.39 %
Etre 25 ha 34 bloaz / Entre 25 et 34 ans	7	30.43 %
Etre 35 ha 49 bloaz / Entre 35 et 49 ans	6	26.09 %
Etre 50 ha 64 bloaz / Entre 50 et 64 ans	5	21.74 %
64 bloaz ha muioc'h / 64 ans et plus	1	4.35 %

73,91% eus ar responderion o deus priziet da vann mennozh an adunvaniezh o deus 49 vloaz pe nebeutoc'h (titour nann-krai, respont 10, sil goulenn 3 = 0)

Reizh / Sexe




Intitulé des réponses	Nombre de réponses	Pourcentage
Paotr / Homme	9	39.13 %
Plac'h / Femme	14	60.87 %

60,87% eus ar responderion o deus priziet da vann mennozh an adunvaniezh zo merc'hed (titour nann-krai, respont 11, sil goulenn 3 = o)

- 4) **Mard oc'h a-du gant an adunvaniezh, menegit ho emplegañ e argraf an adunvaniezh.** *Mann o talvezout ne emplegit tamm ebet ha dek o talvezout e kemer ur plas pouezus en ho puhez.*

Mard oc'h a-du gant an adunvaniezh, menegit ho emplegañ e argraf an adunvaniezh. / Si vous êtes favorable à la réunification, mentionnez votre engagement sur la question de la réunification. Mann o talvezout ne emplegit tamm ebet ha dek o talvezout e kemer ur plas pouezus en ho puhez. / Zéro signifiant que vous ne vous impliquez pas du tout et dix signifiant que cela prend une place importante dans votre vie.




Score moyen	0	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
7.75	18	7	6	13	9	33	33	33	48	35	193
	4.21 %	1.64 %	1.4 %	3.04 %	2.1 %	7.71 %	7.71 %	7.71 %	11.21 %	8.18 %	45.09 %

72,19% a briz da seizh pe muioc'h o emplegañ e argraf an adunvaniezh (titour krai)

Un niver bras a responderion a lavar bezañ empleget e argraf an adunvaniezh, ar pezh a ziskouez adare eo an dud tost diouzh luskadoù sevenadurel pe politikel liammet da Vreizh : n'int ket nemet deuriet gant an adunvaniezh met ivez prest da vezañ empleget.

5) **Pa vefec'h a-du pe get gant an adunvaniezh, hag e soñj deoc'h e vo diouti en dazont ?** *Mann o talvezout n'ez eus chañs ebet e c'hoarvezfe ha dek o talvezout eo sur e vo diouti.*

Pa vefec'h a-du pe get gant an adunvaniezh, hag e soñj deoc'h e vo diouti en dazont ? / Que vous soyez favorable ou non à la réunification, pensez-vous qu'elle aura lieu dans le futur ? Mann o talvezout n'ez eus chañs ebet e c'hoarvezfe ha dek o talvezout eo sur e vo diouti. / Zéro signifiant qu'il n'y a aucune chance que cela arrive et dix signifiant que c'est sûr qu'elle aura lieu.




Score moyen	0	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
	20	11	13	16	14	59	32	41	68	30	152
7.13	4.39 %	2.41 %	2.85 %	3.51 %	3.07 %	12.94 %	7.02 %	8.99 %	14.91 %	6.58 %	33.33 %

63,81% eus ar responderion a briz da seizh pe muioc'h o fiziañs en adunvaniezh. 23,03% o deus ur fiziañs etre pevar ha c'hwec'h. 13,16% a briz o fiziañs etre mann ha tri (titour krai)

Kreñv a-walc'h eo ar fiziañs o deus an dud en adunvaniezh met ket muioc'h eget se. Da geñver priziañ ar santad perzhouriezh e Breizh, priziañ mennozh an adunvaniezh pe c'hoazh priziañ an emgleañ eo gwan ar fiziañs en adunvaniezh. Deurus eo gwelet eo kreñvoc'h ar sentur da vennozh an adunvaniezh eget ar feiz enni. Hep souezh ar re o vezañ emleget e argraf an adunvaniezh o deus muioc'h a spi e vo eus un adunvaniezh :

Mard oc'h a-du gant an adunvaniezh, menegit ho emgleañ e argraf an adunvaniezh. / Si vous êtes favorable à la réunification, mentionnez votre engagement sur la question de la réunification. Mann o talvezout ne emplegit tamm ebet ha dek o talvezout e kemer ur plas pouezus en ho puhez. / Zéro signifiant que vous ne vous impliquez pas du tout et dix signifiant que cela prend une place importante dans votre vie.




Score moyen	0	1	2	3	4	5	6	7	8	9	10
9.05	0	0	0	2	0	5	6	11	17	8	97
	0 %	0 %	0 %	1.37 %	0 %	3.42 %	4.11 %	7.53 %	11.64 %	5.48 %	66.44 %

66,44% eus ar responderion a briz da zek o fiziañs en adunvaniezh, a briz da zek o emgleañ e argraf an adunvaniezh (titour nann-krai, respont 4, sil goulenn 5 = 10)

66,44% eus ar responderion o deus fiziañs bras e vo eus an adunvaniezh a gav dezho int empleget mat e argraf an adunvaniezh, padal n'eo nemet 45,09% evit ar respontoù hollek (s.o. goulenn 4). Komprenadus eo : mar bezer gouest da ouestlañ amzer evit argraf an adunvaniezh eo peogwir ez eus spi en argraf-mañ. Ar c'hontrol zo gwir ivez : emgleañ evit an adunvaniezh a vag a dra sur ar spi a lakaer en argraf.

Dav eo menegiñ n'eo ket ar re yaouankañ o deus fiziañs en adunvaniezh, daoust d'ar pezh a c'heller soñjal, ar re goshañ o deus muioc'h a spi :

Oad/Âge




Intitulé des réponses	Nombre de réponses	Pourcentage
Nebeutoc'h eget 18 vloaz / Moins de 18 ans	0	0 %
Etre 18 ha 24 bloaz / Entre 18 et 24 ans	4	2.65 %
Etre 25 ha 34 bloaz / Entre 25 et 34 ans	13	8.61 %
Etre 35 ha 49 bloaz / Entre 35 et 49 ans	30	19.87 %
Etre 50 ha 64 bloaz / Entre 50 et 64 ans	63	41.72 %
64 bloaz ha muioc'h / 64 ans et plus	41	27.15 %

68,87% eus ar responderion a briz da zek ar fiziañs en adunvaniezh zo 50 vloaz pe muioc'h (titour nann-krai, respont 10, sil goulenn 5 = 10)

68,87% eus ar responderion o deus fiziañs bras en adunvaniezh zo 50 vloaz pe muioc'h, pa'z int 52,53% evit ar respontoù hollek (s.o. goulenn 10). An dra se a genglot gant an amzer bevet e Liger-Atlantel :

Abaoe pegeit emao'h e Liger-Atlantel ? / Depuis combien de temps êtes-vous en Loire-Atlantique ?




Intitulé des réponses	Nombre de réponses	Pourcentage
Nebeutoc'h eget ur bloaz / Moins d'un an	0	0 %
Nebeutoc'h eget pemp bloaz / Moins de cinq ans	10	6.62 %
Nebeutoc'h eget dek vloaz / Moins de dix ans	7	4.64 %
Nebeutoc'h eget ugent vloaz / Moins de vingt ans	17	11.26 %
Nebeutoc'h eget tregont vloaz / Moins de trente ans	17	11.26 %
Muioc'h eget tregont vloaz / Plus de trente ans	100	66.23 %

66,23% eus ar responderion a briz da zek ar fiziañs en adunvaniezh zo o vevañ e Liger-Atlantel abaoe muioc'h eget tregont vloaz (titour nann-krai, respont 13, sil goulenn 5 = 10)

66,23% eus ar responderion o deus fiziañs bras en adunvaniezh zo o vevañ e Liger-Atlantel abaoe muioc'h eget tregont vloaz, padal e kaver 54,95% evit ar respontoù hollek. Tu zo displegañ spi ar re goshañ dre ar fed o deus ur sell hiroc'h war an traoù. Dre e skiant-prenet, un den pemont vloaz en devo un diarsell brasoc'h a-zivout argraf an adunvaniezh eget un den ugent vloaz. Barrekoc'h e vo da welet an traoù war dek, ugent, tregont vloaz. Menegomp ivez e c'hell ivez ar re gozh merzhout un emdroadur eus stad an traoù. Hag e oa kement a bolitikourion o komz eus an adunvaniezh pergont vloaz 'zo ? N'eo ket sur, hag ar re a oa amañ endeo a verzhañ an emdroadur. Ar vartezeadenn-se a glot gant ar fed e vefe tud o vevañ abaoe pell e Liger-Atlantel o deus respontet dreist-holl (s.o. goulenn 13).

6) Hervezoc'h, e peseurt tachenn e rankfe Liger-Atlantel en em glevout gant ranndir Breizh da gentañ ? Ur respont hepken.

Hervezoc'h, e peseurt tachenn e rankfe Liger-Atlantel en em glevout gant ranndir Breizh da gentañ ? / Selon vous, sur quel domaine la Loire-Atlantique devrait s'entendre avec la région Bretagne en priorité ? Ur respont hepken. / Une seule réponse.



Intitulé des réponses	Nombre de réponses	Pourcentage
Armerzh / Économie	158	34.65 %
Politikerezh / Politique	143	31.36 %
Reizh / Justice	5	1.1 %
Sevenadur ha sport / Culture et sport	86	18.86 %
Kevredadelezh / Social	23	5.04 %
Traoù all / Autre chose	41	8.99 %

Respontoù « Traoù all » :

Meur a dachenn pe an holl : 8

Tachenn ebet : 8

Treuzporzh : 6

Yezh : 3

Adunvaniezh : 2

Istor : 2

Trevoniezh : 2

Deskadurezh : 2

Politikerezh : 2

Sevel ur parlamant : 1

Sevel ul luskad rannvroel : 1

Kenelgreizelouriezh : 1

Breudeuriezh : 1

Touristelezh : 1

Ket komprenet ar goulenn : 1

34,65% eus ar responderion o deus meneget an armerzh evel an dachenn a rankfe Liger-Atlantel en em glevout gant Breizh da gentañ penn (titour krai)

Gant an armerzh e rankfe Liger-Atlantel en em glevout gant Breizh da gentañ penn hervez ar responderion, heuliet a dost gant ar politikerezh, an trede hini zo ar sevenadur hag ar sport met pell a-dreñv. Poellek eo kavout « Armerzh » ha « Politikerezh » da gentañ penn : ar pezh a stok an dud end-eeun eo dre vras. Darn ar re o deus dibabet « traoù all » o deus lavaret e oa ret lakaat meur a devet, da skouer « armerzh ha politikerezh », pe « an holl ». Ar re o deus meneget « netra » a glot dre vras gant ar re o deus priziet da vann mennozh an adunvaniezh. Er c'hinnigoù e kaver traoù a vefe bet tu lakaat da glotañ gant ar respontoù kinniget, da skouer ar yezh hag an istor a vefe bet tu lakaat da genglotañ gant « Sevenadur ha sport », an adunvaniezh pe sevel ur parlamant e « Politikerezh » h.a. Divizet eo bet mirout ar respontoù-se e « Traoù all » evit bezañ an tostañ diouzh desell ar responderion.

7) Anv / Diret

235 den o deus roet o anv. En o souez e c'heller tennañ 24,68% (58) a anvioù gant un orin brezhonek, 65,96% (155) a anvioù gant un orin nann-brezhonek, nemet anvioù boutin e Frañs anezho, pa vefe un orin german, latin, galian pe yuzev. Un nebeud a anvioù divoutinoc'h, met o chom e Frañs : eus Elzas pe Katalonia da skouer. 9,36% (22) eus an anvioù zo gant un orin nann-kavet.

Ur palevarzh a anvioù a orin brezhonek zo kalz pa gomzer eus Liger-Atlantel. Nebeut a vrezhoneg zo bet en departamant, estreget Bro-Gwenrann-Sant-Nazer, ha c'hoazh ul lodennig lodennig oa hepken e penn kentañ an XX^{vet} kantved. An takad brasañ a vrezhoneg zo bet er vro zo bet un drederenn diouzh an departamant, Bro-Naoned d'ar mare-se. En em gavout a reomp un tamm etre an daou, ha diaes gouzout mard eo tud eus an hevelep ac'had, tu vefe da skouer

d'ul lodenn anezho dont eus an departamantoù all, Penn-ar-Bed en o souez a oa e Breizh-Izel penn-da-benn.


8) Kentanv / Direct

254 den o deus roet o c'hentanv. En o souez 18,9% (48) o deus ur c'hentanv brezhonek pe a orin brezhonek, 0,4% (1) ur c'hentanv gallaouek, ha 80,7% anv gant un orin all, gall evit darn brasañ anezho, met ivez saoz.

Da c'houzout : gallus eo e vefe bet brezhonekaet o c'hentanv gant lod. Da skouer Jean-Paul e Yann-Baol. Evel just ne dalvez ket an hevelep tra un den a vrezhoneka e gentanv hag unan en deus resevet an anv-se o c'henel. Met ar pezh ne dalvez ket n'eo ket deurus ar stadegoù-se kennebeut : brezhonekaat e gentanv evit ar c'houlennaoueg a dalvez un dra bennak ivez, pa vefe un doare da brouiñ ur santad perzhouriezh e Breizh, pe kemplegañ da reoladoù ar c'houlennaoueg da skouer. Mennozh brezhonekaat e gentanv az a gant efed ar boblvouezhiadeg : ur skod politikel zo, neuze dav eo prouiñ ur santad perzhouriezh da Vreizh.

9) Kumun

Lec'h bevañ ar responention / Lieu de résidence des répondants



110 annezad eus kumun an Naoned o deus respontet d'ar c'houlennaoueg (titour krai)

Gwelet e vez eo ledet a-walc'h lec'h bevañ ar responterion, tu zo menegiñ memestra meur a egor goulo a-walc'h. E Su an departamant e kaver nebeut a responterion, dreist-holl pa dostaer diouzh departamant Vendée. Tu zo displegañ an diouer-se dre an diouer a zeur e argraf ar santad perzhouriezh e Breizh. Abeg an diouer-se a c'heller kompren gant an nebeud a zarvoudoù sevenadurel breizhat o tremen eno, ar bellded sevenadurel ha douaroniel gant peurest Breizh : ar yezh eno n'eo nag ar brezhoneg, nag ar gallaoueg, an adeiladurezh zo tostoc'h diouzh Vendée eget peurest Breizh, perzh ar maezioù-se zo dreist-holl diazezet war ar gwini, pa vefe a-fet kenwerzh pe touristeled, ar pezh zo dibaot e Breizh. Ha koulskoude gwiniegoù 'zo a c'hoari kalz gant skeudenn Breizh evit o arwerzh, ur skod eo d'an nebeutañ. Menegomp daou lec'h a seblant bezañ tost diouzh an argraf e Su al liger : kostez Klison ha dreist-holl kostez aod Bro-Raez. Evit an hini gentañ e c'heller displegañ an deur dre ar perzh istorel. Istor Breizh a vez lakaet en a-raok evit lakaat war well ar c'hastell h.a. Dav deomp menegiñ ivez ar fed e vefe Klison ur gêr vras a-walc'h evit aozañ darvoudoù sevenadurel liammet da Vreizh, ur c'helc'h keltiek en o souez. Evit ar pezh a sell ouzh kostez aodoù Bro-Raez e c'heller komz eus an douristeled : Breizh a vez lakaet kalz war well evit desachañ an dourised. Ret eo lavar ivez ne seblant ket ken war an arlez aodoù Bro-Raez pa seller ouzh kartenn Breizh eget Su pennañ an departamant hag ar vevenn gant Vendée. Abegoù disheñvel vefe da reiñ evit Biz an departamant, gant nebeut a responterion ivez. Paour a-walc'h e darvoudoù sevenadurel eo lodenn-se Liger-Atlantel, he pell eus ar c'hêrioù bras : dres etre an Naoned ha Roazhon a-fet amzer hent. Koulskoude eo Biz Liger-Atlantel al lec'h ma vez komzet ar muiañ gallaoueg hervez studiaden TMO. Un tamm muioc'h a dud zo deuriet gant an argraf tro dro da Gastellbriant, met hep ma na vefe heverk. Kostez ar Briver zo goulo a-walc'h ivez. Digomprenus eo an diouer a zeur el lodenn-se eus Liger-Atlantel, dreist-holl o wellout eo gourizet gant kumunioù tost tost diouzh an argraf : Gwenrann, ar Baol, Sant-Nazer, Pornizhan h.a.


Un deur anat a c'heller merzhout evit an Naoned, dre ma'z eo ar gumun gant ar muiañ a responterion. Met an anadenn-se zo da vezañ arlivet : an Naoned zo ivez ar gumun gant ar muiañ a annezidi e Liger-Atlantel. Padal eo anat a-walc'h merzhout ar gurunenn zo tro-dro d'ar gêr : Sant-Ervlan ha Reudied zo deuriet da vat gant argraf ar santad perzhouriezh e Breizh, heuliet gant Sant-Sebastian-an-Enk, Gwerzhav, Kervegon, Koueron, Kerc'hfaou, Orvez, Saotron, Sant-Juluan-Kankell, Tarvieg, Sant-Stefan-Brengoloù ha Chapel-Erzh. Bez on eus enta ur blein naonedat pouezus gant kêr an Naoned e-kreiz ha gronnet gant kumunioù all. Tu zo kanteizhañ ar blein-se gant ar vuhez sevenadurel a c'heller kavout eno. An Naoned, met ivez Sant-Ervlan, zo takadoù puilh kenañ a-fet darvoudoù sevenadurel liammet da Vreizh : skolioù Diwan, sonadegoù, diskouezadegoù, bagadoù, *Agence Culturelle Bretonne* h.a. Dav eo menegiñ memestra ne glot ket dre ret deur an Naonediz evit an argraf gant ur santad perzhouriezh e Breizh kreñv pe ur c'hoant a adunvaniñ, evel ma'z eo bet gwelet er goulenn 3.

An eil blein a zeur e argraf ar santad perzhouriezh zo Bro-Gwenrann-Sant-Nazer. Ahont e kaver ur gronn a gumunioù deuriet da vat gant an argraf : Gwenrann ha Sant-Nazer evel-just, met ivez ar Baol-Skouleg, ar Poulgwenn, Pornizhan, ar Groazig, Erbigneg, Donged, Pontkastell-Keren ha dre astenn Saveneg. Amañ e kaver ur gronn a gumunioù o vezañ stag ouzh an argraf en un doare heverk. Pep elfenn meneget a-raok zo bodet amañ a-benn displegañ an deur-se : tost diouzh peurest Breizh eo ar vro-se, eleze o stekiñ ouzh Morbihan met nebell eus Il-ha-Gwilun ivez, touristel al lec'h hag int da lakaat kalz war-well skeudenn Breizh ha poblet a-walc'h evit aozañ darvoudoù liesseurt liammet da Vreizh. Ret eo menegiñ un elfenn diwezhañ,

met a bouez, Bro-Gwenrann-Sant-Nazer oa lec'h nemetañ Breizh-Izel e Liger-Atlantel, eleze o komz brezhoneg. E hoaladoù disheñvel e veze komzet brezhoneg eno, e penn-kentañ an 20^{vet} kantved e oa nebeud a gumunioù o komz brezhoneg c'hoazh er vro (Bourc'h-Baz ha Gwenrann da skouer), ar vro a-bez en deus komzet brezhoneg d'ur mare avat, estreget Sant-Nazer marteze. Douaroniezh, armerzh ha sevenadur : peptra zo graet e Bro-Gwenrann-Sant-Nazer evit deuriañ an dud da argraf ar santad perzhouriezh e Breizh.

Tu zo da geñveriañ deur an annezidi gant o santad perzhouriezh e Breizh o tiskouez ur gartenn gant ar responderion o priziañ da zek o santad perzhouriezh e Breizh. Kazi an hevelep disoc'hoù a gaver, rak ur wech ouzhpenn darn ar responderion zo tud tost diouzh argraf an adunvaniezh h.a. Ar bleinoù pennañ zo an hevelep re : Bro-Gwenrann-Sant-Nazer hag an Naoned gant e gurunenn. Al lec'hioù o koll tud, eleze lec'hioù ma oa un deur met nebeut a santad perzhouriezh e Breizh, zo al lec'hioù war an arlez : Blaen, Klison ha Keller. Koste aodoù Bro-Raez a zalc'h memestra.


Lec'h bevañ ar responderion gant ur santad perzhouriezh e Breizh kreñv (priziet da 10) /
Lieu de résidence des répondants avec un fort sentiment d'appartenance à la Bretagne
(évalué à 10)



76 responder eus kumun an Naoned o deus priziet da zek o santad perzhouriezh (titour nann-krai, respont 9, sil goulenn 1 = 10)

10) Oad

Oad/Âge




Intitulé des réponses	Nombre de réponses	Pourcentage
Nebeutoc'h eget 18 vloaz / Moins de 18 ans	0	0 %
Etre 18 ha 24 bloaz / Entre 18 et 24 ans	30	6.59 %
Etre 25 ha 34 bloaz / Entre 25 et 34 ans	60	13.19 %
Etre 35 ha 49 bloaz / Entre 35 et 49 ans	126	27.69 %
Etre 50 ha 64 bloaz / Entre 50 et 64 ans	143	31.43 %
64 bloaz ha muioc'h / 64 ans et plus	96	21.1 %

Hini ebet eus ar responderion zo yaouankoc'h eget 18 vloaz. 6,59% o deus etre 18 ha 24 bloaz ; 13,19% etre 25 ha 34 bloaz ; 27,69% etre 35 ha 49 bloaz ; 31,43% etre 50 ha 64 bloaz ; ha 21,1% o deus muioc'h eget 64 bloaz. 52,53% o deus 50 bloaz pe muioc'h (titouroù krai)

52,53% eus ar responderion o deus 50 vloaz pe muioc'h. Stabil a-walc'h eo an oadoù adalek 35 bloaz. Nebeut a responderion yaouank zo avat. Diaes eo displegañ an nebeud a zeur zo gant ar re yaouank. Tu zo menegiñ ar fed e vefe studierion dreist-holl, a zo techet da zont eus kêrioù all eus Frañs. Tu zo soñjal ivez n'en em sant ket reizhwiriek ar re yaouank da respont da c'houlennoù politikel pe sevenadurel. Se zo da venegiñ dreist-holl evit ar re yaouankoc'h eget 18 vloaz. D'an oad-se n'eo ket stummet da vat ar mennozhioù politikel hag int da dermal a-raok respont, pe zoken na respont evel ma vez gwelet amañ.

11) Reizh

Reizh / Sexe



Intitulé des réponses	Nombre de réponses	Pourcentage
Paotr / Homme	351	77.14 %
Plac'h / Femme	104	22.86 %

77,14% eus ar responderion zo paotred ha 22,86% zo merc'hed (titour krai)

Ur brasniver a baotred o deus respontet d'ar c'houlennaoueg (77,14%) da geñver ar merc'hed (22,86%). Diaes displegañ an anadenn-se, dre vras e vez lavaret en em sant reizhwiriekoc'h ar baotred da respont d'ar sontadurioù h.a., souezhus evit an argraf-se met ur vartezeadenn eo.


Deurus eo keñveriañ an disoc'hoù dre reizh. Da gentañ ez eus un diforc'h bras er santad perzhouriezh : 64,42% eus ar merc'hed a briz da zek o santad perzhouriezh e Breizh (titour nann-krai, respont 1, sil goulenn 11 = plac'h), 80,34% evit ar baotred (titour nann-krai, respont 1, sil goulenn 11 = paotr). Evit ar goulenn 3, kavet e vez kalz muioc'h a merc'hed o priziañ da vann mennozh an adunvaniezh, 13,46% anezho (titour nann-krai, respont 3, sil goulenn 11 = plac'h) a-enep 2,56% evit ar baotred (titour nann-krai, respont 3, sil goulenn 11 = paotr). Dammheñvel eo ar respontoù all pa geñverier ar reizhoù. Neuze mont a rafe displegadenn an diforc'h a reizh e-touez ar responderion kentoc'h eus kostez ar fed ne vefe ket ken deuriet ar merc'hed gant argraf ar santad perzhouriezh e Breizh e Liger-Atlantel hag an adunvaniezh, pe gant muioc'h a merc'hed a-enep ar mennozh-se.

12) Micher

454 respont : 71,15% zo oberiat (323) ha 28,85% zo dioberiat (131). Er 131 dioberiad e kaver 80,9% war o leve (106) ha 19,1% a studier (18), tud dilabour (6) pe c'hoazh nammet (1).

13) Abaoe pegeit emaoe'h e Liger-Atlantel ?

Abaoe pegeit emaoe'h e Liger-Atlantel ? / Depuis combien de temps êtes-vous en Loire-Atlantique ?




Intitulé des réponses	Nombre de réponses	Pourcentage
Nebeutoc'h eget ur bloaz / Moins d'un an	8	1.76 %
Nebeutoc'h eget pemp bloaz / Moins de cinq ans	29	6.37 %
Nebeutoc'h eget dek vloaz / Moins de dix ans	28	6.15 %
Nebeutoc'h eget ugent vloaz / Moins de vingt ans	64	14.07 %
Nebeutoc'h eget tregont vloaz / Moins de trente ans	76	16.7 %
Muioc'h eget tregont vloaz / Plus de trente ans	250	54.95 %

54,95% eus ar responderion a vev e Liger-Atlantel abaoe muioc'h eget tregont vloaz ha 1,76% eus an dud a vev eno abaoe nebeutoc'h eget ur bloaz (titour krai)

Evel ma'z eo bet gwelet gant ar goulenn 10, brasniver ar responderion zo tud pemont vloaz pe muioc'h (52,53%). Tu vefe soñjal e klot an titour-se gant ar responderion koshañ met n'eo ket gwir dre ret. Stabil a-walc'h eo an oadoù, zoken evit ar re o vevañ abaoe muioc'h eget tregont vloaz en departamant :

Oad/Âge



Intitulé des réponses	Nombre de réponses	Pourcentage
Nebeutoc'h eget 18 vloaz / Moins de 18 ans	0	0 %
Etre 18 ha 24 bloaz / Entre 18 et 24 ans	0	0 %
Etre 25 ha 34 bloaz / Entre 25 et 34 ans	15	6.02 %
Etre 35 ha 49 bloaz / Entre 35 et 49 ans	67	26.91 %
Etre 50 ha 64 bloaz / Entre 50 et 64 ans	91	36.55 %
64 bloaz ha muioc'h / 64 ans et plus	76	30.52 %

36,55% eus ar responderion o vevañ abaoe muioc'h eget 30 vloaz e Liger-Atlantel o deus etre 50 ha 64 bloaz (titour nann-krai, respont 10, sil goulenn 13 = muioc'h eget tregont vloaz)

Dre vras e vez gwelet eo ledet mat an oadoù, evel-just ez eus nebeutoc'h a dud etre 25 ha 34 bloaz, ul lodenn anezho a c'helle respont hepken (ar re goshoc'h eget 30 vloaz). Tu zo displegañ deur ar re o vevañ abaoe pell e Liger-Atlantel e argraf ar santad perzhouriezh e Breizh dre ar gwiziennañ. Un den a na vefe ket gwiziennet en departamant dre ret en defe muioc'h a aester da gemmañ lec'h bevañ, pa vefe kemmañ departamant, ranndir, pe zoken bro. Ar re o vevañ abaoe pell e Liger-Atlantel o deus muioc'h a chañsoù da vezañ deuriet gant argraf santad perzhouriezh o departamant, pa vefe ur santad perzhouriezh e Breizh pe e lec'h all. An eil displegadenn zo un displegadenn a reizhwiriegezh. Un den o vevañ en departamant abaoe pell na dermo ket da respont da seurt goulennaoueg, d'an nebeutañ ket en abeg da zeselloù a reizhwiriegezh. Unan all oc'h erruout nepell 'zo en departamant a vo etre daou a-raok respont, ne vo ket sur eo eñ er c'hevredig buket.

A zo muioc'h, e verzher ur geflended etre ar fed bevañ abaoe pell e Liger-Atlantel hag ar santad perzhouriezh e Breizh : 81,2% eus ar responterion o vevañ en departamant abaoe nebeutoc'h eget tregont vloaz a briz da zek o santad perzhouriezh e Breizh (titour nann-krai, respont 1, sil goulenn 13 = nebeutoc'h eget tregont vloaz), 81,2% ivez evit ar re a vev en departamant abaoe muioc'h eget tregont vloaz (titour nann-krai, respont 1, sil goulenn 13 = muioc'h eget tregont vloaz). Dalc'homp soñj eo 76,81% ar priziañ-se evit ar respontoù hollek (s.o. goulenn 1). Ar re o vevañ abaoe pell en departamant zo muioc'h techet da soñjal e vo eus an adunvaniezh en dazont eget ar re all : 40,16% a briz da zek o spi en adunvaniezh (titour nann-krai, respont 5, sil goulenn 13 = muioc'h eget tregont vloaz) pa'z eo 33,33% er respontoù hollek (s.o. goulenn 5). Tu zo displegañ an anadenn-se evel-mañ : mar bez un den eus Liger-Atlantel gant ur santad perzhouriezh breizhat kreñv ha gant ur spi bras en adunvaniezh en devo muioc'h a chañsoù da chom en departamant eget unan ha n'en defe spi hebet hag a c'hellfe enta mont e departamantoù all Breizh.

Teul Breizh Diawel

Klozadur

Ur wech bet sellet pizh ouzh disorc'hoù an dud o kemer amzer da respont d'ar c'houlennaoueg hag ur wech graet un dezrann ez eus tu ober ur ventel hollek. Evel ma'z eo bet meneget en digoradur, egin ar c'houlennaoueg zo ur ranellerezh hiniennel, ur c'hoant da c'houzout piv a gaver a-dreñv ar sifroù. Danvez respontoù zo bet kavet amañ, ur meni a zisplegadenn met goulennou ouzhpenn zo diwanet evel-just, efed rakweladus ur studiadenne eo se.

Ar pezh zo bet dianaet gant ar studiadenne zo perzhioù ar responderion. Seurt goulennaoueg a zesach ur c'hevredig resis, barrek da enluskañ prim hag efedus. Buan eo bet rannet ar c'houlennaoueg hag an dud da vountañ an eil re ar re all da respont. Efed ar boblvouezhiadeg zo liammet gant an dra-se, eleze evel ez eus ur skod politikel eo ret enluskañ en un doare efedus a-benn lakaat war-wel ar skod-se hag eñ da vezañ enbannet ar muiañ ar gwellañ. Aesaet eo an enluskañ dre ma emdro ar responderion en un endro dammheñvel. Da skouer perzh an darvoudoù sevenadurel liammet d'an emplegañ e argraf an adunvaniezh. An tuadurioù douaroniel zo liammet gant ar mennozh-se ivez. Poellek eo kaout ur santad perzhouriezh kreñv ha bezañ empleget en argraf an adunvaniezh pa'z eus un endro gant darvoudoù sevenadurel breizhat en tro-war-dro.

Ur wech lavaret eo ur c'hevredig arbennik en deus respontet dreist-holl, tu zo klask ober poltred ar responder. Ar responderion zo dreist-holl tud o deus bevet darn o buhez e Liger-Atlantel, oberiat darn anezho ha war o leve evit an darn all, paotred evit muianiver anezho, prest da ouestlañ amzer evit argraf an adunvaniezh hag o vevañ pe en Naoned hag e gurunenn pe e Bro-Gwenrann-Sant-Nazer evit ul lodenn vras a responderion. Setu an tuadurioù pennañ. Dav eo menegiñ memestra ez eus enep tuadurioù. Bez ez eus skouer ul lodenn a Naonediz o vezañ kentoc'h galenus gant mennozh an adunvaniezh, yaouankoc'h eget ar geidenn ha gant muioc'h a verc'hed en o souez.

Ur skeudennadur resis a-walc'h a gaver a-zivout douaroniezh ar responderion, hag a ro ur sell all war an argraf. Peder elfenn a c'hell displegañ mar bez un egor tost diouzh ar santad perzhouriezh pe get : an nested diouzh departamantoù all Breizh, an istor sevenadurel, ar skodoù armerzhel ha mar bez war an arlez pe get an egor. An nested gant ranndir Breizh n'en deus ket ul levezon heverzh met ul liamm a zo, sur. Gwir eo evit Bro-Gwenrann-Sant-Nazer ha gwir eo dre diskemm evit Su an departamant, menegomp n'eo ket gwir evit Norzh an departamant a zo stok ouzh Il-ha-Gwilun koulskoude. An eil elfenn, a seblant bezañ kreñvoc'h, zo an istor sevenadurel, ha dreist-holl ul liamm gant ar brezhoneg. Se zo perzh anat Bro-Gwenrann-Sant-Nazer. N'eo ket ken splann gant an egorioù ma'z eo kreñv a-walc'h ar gallaoueg c'hoazh. An trede hini zo pouezus a-walc'h : an armerzh hag an diorren. Ur pouez en deus gant an douristelezh da skouer – alies liammet gant an istor sevenadurel –, a ro ur splot anat d'ar santad perzhouriezh e Breizh. Un egor gant ur saviad armerzhel frouezhus en devo ivez aesterioù da aozañ darvoudoù sevenadurel hag enta darvoudoù sevenadurel liammet da Vreizh. Ar pedervet elfenn, liammet strizh ouzh an trede hini zo ar fed e vefe war an arlez pe get un

egor. An egorioù kreizennet, poblet, gant ur blein desach ha gant un douaroniezh splotus o devo ur feur a zeur er santad perzhouriezh brasoc'h. Anat eo evit an Naoned hag anat dre diskemm evit Norzh an departamant a zo memestra war an arlez. Ur wech meneget ar peder elfenn eo anat e vefe Bro-Gwenrann-Sant-Nazer ur blein deuriet kenañ gant argraf ar santad perzhouriezh e Breizh : tost diouzh Morbihan, chomet e Breizh-Izel e-pad pell, un armerzh lañsus hag an tiriad n'emañ ket war an arlez. Stabil ha dasparzet mat eo amañ ar peder elfenn. Kêr an Naoned hag e gurunenn a glot ivez gant an elfennoù-se met en un doare distabil : n'eo ket tost diouzh an departamantoù all met ur skeudenn a gêrbenn he deus, an istor sevenadurel liammet da Vreizh n'eo ket ken heverzh ha Bro-Gwenrann-Sant-Nazer met ur wech ouzhpenn skeudenn kêrbenn Vreizh a gemm an traoù, an armerzh zo frouezus frouezus, hag an Naoned zo, ez despizadur, kontrol ur gêr war an arlez. Div elfenn zo gwan, ha div elfenn zo kreñv kreñv.

Ur mennozh a c'heller kaout enta diouzh douaroniezh ha kevredadouriezh annezad Liger-Atlantel gant ur santad perzhouriezh e Breizh kreñv. Un nebeud titouroù on eus a-fet sevenadur met dispis e chom evelkent. Ur wech livet ur skeudennadur eus an dud gant ur santad perzhouriezh e Breizh e Liger-Atlantel, peseurt diawel ober a-zivout an argraf ? Diaes eo ober un diawel sur a-zivout seurt dodenn, kement a zezverkoù zo da gemer e kont, ha ken diasur eo an dazont zoken evit un dodenn ken lec'hel hag ar santad perzhouriezh e Breizh e Liger-Atlantel. Tu zo rakwelout skodoù a c'hellfe cheñch disoc'h an argraf. Bez eus skod ar maezioù : hervez mar bezont adpoblet pe mar chomont en arlez e kemmo o santad perzhouriezh, an tuadur pennañ evit ar mare a lak da soñjal e vint c'hoazh muioc'h war an arlez ha neuze e tigresko ar santad perzhouriezh war ar maez, daoust ma vez ivez un enep-tuadur, lent c'hoazh, a dud o tistreiñ war ar maez. Er fin, n'eo ket sur e rofe ar c'hemm-se un digresk heverzh a santad perzhouriezh e Breizh met reiñ a rafe un digemm sklaer etre maezioù ha kêrioù. Fiñvusted an dud a gemmo a dra sur feur a santad perzhouriezh e Breizh e Liger-Atlantel er bloavezioù o tont. Ur bern tud nevez a zeu e Liger-Atlantel, pa vefe tud war o leve o en em staliañ war an aodoù, tud oberiant o tont eus Paris pe zoken eus broioù all, astaolioù a vo er santad perzhouriezh ivez. Dav eo menegiñ er c'hontrol ar fed e vefe lec'hioù gant ur bleiñ armerzhel pouezus a vounto lod da chom da labourat er vro ar pezh a zalc'ho memestra un diaz solud a santad perzhouriezh e Breizh. Perzh ar bolitikourion en devo ul levezon anat ivez er santad perzhouriezh e Breizh e Liger-Atlantel. Evel-just mar gra ar bolitikourion oberennoù a-du gant ar sevenadur breizhat ez eus chañsoù evit ma vefe kreñvaet ar santad perzhouriezh e Breizh. Ar pezh zo diasuroc'h zo mar chom an traoù hep kemmañ en dachenn bolitikel. Mar chom digemm an traoù e-pad ur mare hir, diaes kenañ eo meizañ penaos ez emdroo an traoù.